

Tri martolod yaouank – tra la la, la di ga dra
 Tri martolod yaouank o voned da veajiñ
 O voned da veajiñ ge, o voned da veajiñ

Gant avel bet kaset – tra la la, la di ga dra
 Gant avel bet kaset b'tek an Douar Nevez
 Betek an Douar Nevez ge, betek an Douar Nevez

E-kichen maen ar veilh – tra la la, la di ga dra
 E-kichen maen ar veilh o deus mouilhet o eorioù
 O deus mouilhet o eorioù ge, o deus mouilhet o eorioù

Hag e-barzh ar veilh-se – tra la la, la di ga dra
 Hag e-barzh ar veilh-se e oa ur servijourez
 E oa ur servijourez ge, e oa ur servijourez

Hag e c'houlenn ganin – tra la la, la di ga dra
 Hag e c'houlenn ganin pelec'h 'n eus graet konesañs
 Pelec'h 'n eus graet konesans ge, pelec'h 'n eus graet konesañs

E Naoned er marc'had – tra la la , la di ga dra
 E Naoned er marc'had hor boa choazet ur walenn
 Hor boa choazet ur walenn ge, hor boa choazet ur walenn

Gwalenn ar bromesa, tra la la , la di ga dra
 Gwalenn ar bromesa, ha par omp da zimeziñ
 Ha par omp da zimeziñ ge, ha par omp da zimeziñ